

183
 Guers an intañvez hage zeis bujel

I

Ston Varia ar merzer me meus amzer goller
 O tarempred eur fumelen ar gaera ioa eur bed.

II

Oia ma deviche madou evel ma deuz genet
 em liche eur consolation o tont d'e darempred.

III

Un han Doue va fied var ar mor na zeoc'h her
 roh an avel zo chansus a c'hui vezo beuzet.

IIII

Ma c'hoarvez deoc'h mervel cetu me n'ameuz den
 me zo digaset oman e leac'h ne anavezan den.

V

Aben an daou fe an tri mis goude m'eo partiet
 cetu ar c'helou din me euz maro va fied.

VI

Escoas tri daol var va frenest aga ioa soaten no
 pa roan eat em quele da gemer va repros.

VII

Savit savit intanvez savit en eur bresant
da ríseo calon ho fried en eur voestic arí hant

VIII

Sevel a ra an intanvez a gommons da vouela
en han Doue va fried e feleac'h emout breman

IX

Marteze e zout maro femp cant les diouzin
taolet da eskernigou dar fresket da zibri.

X

Ma vancesfe an dud iacouank fia zeont da zimia
pe quen bras eo an sanken fia zeu an disparti.

XI

Da mab en em laka er studi evit mont da veleh
ma va merc'h en em laka er studi evit mont da leanez.

XII

Nep a velehi an intanvez n'a var baviou Bouen
e zreid var eur fantoufou eur bazou stam gloan.

XIII

E zreid var eur fantoufou eur bazou stam gloan du
an daelou euz e daoulagad oc'h arosi ar ru.

XIV

Nep a velche an intañvez oc'h antren en ilis
 Si age zeis minorie n'ag hi guisket e gris.

XV

Nep a velche an intañvez o fignat en e c'homb
 dirazi daou gapucin a daou gloareh iaouant

XVI

En esper e c'honsoli e c'honsoli n'eller het
 red eo ober an tribu da vam salver ar bed.

XVII

Mea vichen me eur baradosen eur flasic lion
 me a va zeis minorie ha va fried morvan.

XVIII

Me a ganche eno gant ar voues lucla
 an te Deum laudamus ar salve regina.